

TROIAD


SINEMA E BREZHONEG EVIT AR SKOLIOÙ
KENURZHIET GANT DAULAGAD BREIZH

Ar Briñsez

hag an Eostlig



FICHENNOÙ AR SKOLIDI
Kinniget gant Daoulagad Breizh



FICHENN 1 An istorioù


Mesket eo bet fotogrammoù an 3 istor.

Kelc'hit fotoioù ar film 1/ An erer hag al laouenan gant liv **DU**.

Kelc'hit fotoioù ar film 2/ Golvaned gant liv **RUZ**

ha fotoioù ar film 3/ Ar briñsez hag an eostig gant liv **GWER**.


Lakait anezho en urzh eus 1 da 3.




Trec'h eo al laouenan. Dont a ra da vezañ roue.




Kerez a sell ouzh al laboused gant he mignonez nevez, Bleuenn.



Mont a ra d'e heul er menez.



Ar manac'hig en em gav gant ur golvan.




Al laouenan a zifi an erer : klask a raint mont an uhelañ posupl en oabl.



Ur wech m'eo deuet kozh ez a en-dro ar manac'h d'e vanati.



Tec'hout a ra Kerez kuit eus ar gêr.



Komz a ra an erer ouzh an holl laboused bodet tro-dro dezhañ.



Kerez a fell dezhi mont maez met ne fell ket d'he zad.

FICHENN 2 Anavezout al laboused


Penaos eo al laboused ?

Ro anv pep lodenn eus korf al labous a anavezez. Diskouez anezho gant da viz. Didroc'h pep ger-tikedenn goude. Peg pep hini anezho war ar sifr mat (eus 1 da 8)



✂ Penn ✂ Lost ✂ Beg ✂ Bruched

✂ Pav ✂ Lagad ✂ Askell ✂ Bizied



FICHENN 3 Livioù a bep seurt !

E-touez an 20 labous-se ez eus 3 a vez gwelet 2 wech.

Met diwall mat, n'emaint ket tout plaset memes mod. **Kelc'h anezho !**



FICHENN 4 Nijal evel ul labous

Da bep lec'h !

Gra ur c'helc'h tro-dro d'ar respont mat :

1) An erer hag al laouenan a ra ur redadeg evit klask gouzout piv az aio...

ar buanañ

ar goustadikañ

an trouzusañ

an uhelañ

2) Pelec'h emañ al laouenan e-keñver an erer ouzh ar skeudenn-se ?

Gra ur c'helc'h tro-dro d'ar respont mat.

Emañ al laouenan...

a-gleiz

a-us

a-zehoù

dindan

Skriv ar respont mat e pep toull :

.....

.....



.....

.....

Ped labous a zo ?

Liv ar sifr mat

5


8

10

Skriv anezhañ

.....





FICHENN 5 Kaout fiziañ ennon






Er film *An erer hag al laouenan* e sav al laouenan, unan eus laboused bihanañ Europa, a-enep d'an erer bras ha meurdezus. Fiziañs vras en deus ennañ daoust dezhañ bezañ ken bihan !

Re wir, n'eo ket ar ment a gont !

Fiziañs a c'hellez kaout ennout !

Evit kaout kement a fiziañs hag al laouenan bihan e-tal an erer meur, ha kemer kalon, **gra an embreg-se** :



-  Sav en da sav, da dreid war blad an douar ha da zivrec'h war-hed da gorf.
-  Lak en da soñj out-te al laouenan.
-  Digor da zivrec'h evel ma rajes gant divaskell bras. Sav ha diskenn anezho evel ma vijes o flapañ da zivaskell.
-  Gra buanoc'h-buanañ en ul lavar ar frazennoù da heul a vouezh uhel :
 - « Nijal a ran uhel »
 - « Uhel-tre ! »
 - « Uheloc'h-uhelañ ! »
 - « Touch a ran ar stered ! »
-  Diskenn war an douar dousig goude, o flapañ da zivaskell goustadikoc'h-goustadikañ.
 - « Diskenn a ran dousig war an douar... »

Mesket eo gerioù ar frazenn-mañ ! **Lak anezho en urzh vat.**

E fin ar film *Ar briñsez hag an eostig* he deus graet Kerez un diviz.

a ra - dineizhañ - Kerez

Gouzout a ouies e vez lavaret « kalonek evel ur c'hilhog » e brezhoneg ?

Fin evel eo al laouenan.

Troioù-lavar all diwar-benn al loened a anavezez ?

FICHENN 6 Bezañ dizalc'h ha kurius

Deskriv ar pezh a welez er skeudenn-se.
Petra a fellfe da Gerez ober ?

.....
.....



Petra emañ ar manac'hig oc'h ober ?
Asambles gant piv emañ-eñ ?

.....
.....



Plijout a ra dit bezañ er-maez ? Perak ?

.....
.....

Kurius eo Kerez hag ar manac'hig. Dedennet int gant al laboused ha fellout a ra dezho anavezout ar bed bras.

Ha te, gant petra out kurius ? Petra a blij dit ober ?

.....
.....


Komz a ra an eostig gant Bleuenn ha sikour a ra da Gerez :


Gra ur c'helc'h tro-dro d'ar responoù mat :

da anavezout ar bed da vezañ dizalc'h

da zebriñ he
gwalc'h

da vont maez eus
ar gêr







FICHENN 7 Tres da labous

Desk penaos tresañ ul labous, evel ma ra Kerez !

Gra hervez kemennoù da skolaer pe da skolaerez.



A large rectangular area with a dotted border, intended for writing or drawing.



FICHENN 8a Kludet er wezenn

Dinijet eo al laboused a selle Bleuenn ha Kerez outo. En em strewet int a bep tu !

Sikour dezho da zont en-dro da gludañ war brankoù o gwez.



Liv ar wezenn gant kreionoù liv.





Didroc'h pep labous.




Peg ul labous war bep brank er wezenn.

Kuzhet ez eus ul laouenan en o zouez. Pehini eo, d'az soñj ?
Ha pelec'h emañ an eostig ?






FICHENN 8b Kludet er wezenn





FICHENN 9 Skeudennoù ouzpenn

An erer hag al laouenan



Golvaned



Ar briñsez hag an eostig

